



**MLK-Gwened**

## **Statuts de l'association**

### **«MLK – Gwened»**

#### **Article 1. Titre de l'association**

Il est fondé entre les adhérents une association régie par la loi du 1er juillet 1901 et le décret du 16 août 1901, sous la dénomination: "MLK-Gwened".

#### **Article 2. Objet de l'association**

L'association MLK-Gwened a pour objet de créer et de gérer une monnaie locale complémentaire citoyenne, sur le territoire du Golfe du Morbihan - Vannes Agglomération, pour favoriser la relocalisation de l'économie, les pratiques écologiques et solidaires et le renforcement du lien social.

#### **Article 3. Siège social**

Le siège social est fixé à la maison des associations de Vannes, 31 rue Guillaume Le Bartz - 56000 Vannes.

#### **Article 4. Structure et responsabilité**

L'association est de structure collégiale.

La responsabilité de l'association est partagée par l'ensemble des adhérents à jour de leur cotisation.

#### **Article 5. Adhésion**

Est adhérente toute personne qui en fait la demande, qui adhère aux présents statuts, qui respecte la charte et le règlement intérieur de l'association.

Seuls les adhérents à jour de leur cotisation annuelle peuvent prendre part aux décisions.

## **Statudoù ar gevredigezh**

### **«MLK – Gwened»**

#### **Mellad 1. Anv ar gevredigezh**

Krouet e vez etre an izili ur gevredigezh hervez lezenn ar 1añ a viz Gouere 1901 ha dekred ar 16 a viz Eost 1901, anvet "MLK-Gwened".

Gwreskanv «Moneiz Lec'hel Klokaat – Gwened» eo «MLK-Gwened».

#### **Mellad 2. Danvez ar gevredigezh**

Krouiñ hag ober war-dro ur moneiz lec'hel klokaat keodedour e takad Mor Bihan - Tolpad Gwened eo pal ar gevredigezh "MLK - Gwened".

Ar moneiz-se a harpo adlec'hiadur an armerzh, embregadoù ekologel ha kengret ha kresk al liammoù kevredadel.

#### **Mellad 3. Sez kevredadel**

Staliet eo ar sez kevredadel e ti ar c'hevredigezhioù, 31 straed Guillaume ar Bartz - 56000 Gwened.

#### **Mellad 4. Framm hag atebegezh**

A-stroll e vez meret ar gevredigezh.

Rannet e vez atebegezh ar gevredigezh etre an holl izili bet paeet o skodenn vloaz ganto.

#### **Mellad 5. Ezeladur**

Ezel eo kement hini a ra ar goulenn, a entu gant ar statudoù-mañ, gant karta ar gevredigezh ha reoliadur diabarzh ar gevredigezh.

N'eus nemet an izili hag o deus paeet o skodenn vloaz a c'hell kemer perzh en divizoù.

## Article 6. Règlement intérieur

Un règlement intérieur précise le fonctionnement de l'association MLK-Gwened.

## Article 7. Ressources

Les ressources de l'association sont constituées par les cotisations des adhérents, leur participation aux activités, les produits des manifestations qu'elle organise, les dons et subventions qui pourront lui être accordés, ainsi que toutes autres ressources autorisées par la loi.

## Article 8. Assemblée plénière

L'assemblée plénière est constituée des adhérents à jour de leur cotisation. Elle est convoquée au moins une fois par an par le Conseil d'Animation. Elle désigne en son sein les membres du Conseil d'animation et fixe les grandes orientations de l'association.

## Article 9. Conseil d'animation (CA)

Il est élu en assemblée plénière pour un an.

Le conseil d'animation gère l'association et prend toutes les décisions nécessaires en cohérence avec les orientations définies en assemblée plénière.

Le CA désigne des membres pour exécuter les décisions et assurer la représentation de l'association auprès des tiers.

## Article 10. Radiation

La qualité d'adhérent se perd par :

- la démission ;
- le décès ;
- le non-respect de la charte de l'association, de ses statuts ou du règlement intérieur. La radiation est alors prononcée par le conseil d'animation.

## Article 10. Dissolution

La dissolution de l'association pourra être prononcée par les adhérents lors d'une assemblée plénière. Un(e) ou plusieurs liquidatrices/liquidateurs sont alors nommé(e)s et l'actif net est, s'il y a lieu, reversé à une association poursuivant des buts similaires.

## Mellad 6: Reoliadur diabarzh

Resisaet e vez doareoù mont en-dro ar gevredigezh MLK-Gwened er reoliadur diabarzh.

## Mellad 7. Korvoderioù

Dont a ra korvoderioù ar gevredigezh eus skodennoù an izili, eus o ferzhiadegzh d'an obererezhioù, eus an diskeladurioù aozet gant ar gevredigezh, eus an donezonoù hag ar skoaziadoù a c'hello bezañ roet dezhi hag eus an holl korvoderioù aotreet gant al lezenn.

## Mellad 8. Emvodoù-meur

Strollet e vez an izili bet paeet o skodenn vloaz ganto en emvodoù-meur. Galvet e vez un emvod-meur ur wech ar bloaz da nebeutañ gant ar C'huzul Luskañ.

E touez an izili o kemer perzh en emvod-meur e vez dibabet gant an emvod-meur izili ar C'huzul Luskañ. Gant an emvod-meur e vez divizet henchadurioù meur ar gevredigezh.

## Mellad 9. Kuzul Luskañ

Dilennet e vez evit ur bloavezh.

Gant ar C'huzul Luskañ e vez meret ar gevredigezh ha kemeret an divizoù ret, gant ma 'z int a-du gant heñchadurioù an emvod-meur.

Gant ar C'huzul Luskañ e vez dibabet izili evit lakaat an divizoù e-pleustr hag ober e anv ar gevredigezh en diavaez.

## Mellad 10. Ezrolladur

N'eo ket ezel ken kemen hini:

- a ro e zilez ;
- a varv ;
- ne entu ket gant karta ar gevredigezh, gant ar statudoù pe gant ar reoliadur diabarzh. Bez e c'hell bezañ skarzhet d'ar mare-se dre un diviz e-doug un emvod Kuzul Luskañ.

## Mellad 10. Divodadur

Divoded e c'hell ar gevredigezh bezañ da heul diviz an emvod-meur. Un dibennfreuzer(ez) pe meur a hini a vez anvet evit reiñ ar fred rik, ma vez anezhañ, d'ur gevredigezh he deus ur pal damheñvel.